


YODKERCH

AR GELAOUENN A ZEU
ER-MAEZ BEP TRO MA
VEZ EMBANNET!



Ni V.14

2 LUR



FEIZ ha REIZH



Feiz ha Breizh! Arabat distreiñ war gement-se!
 Yod-kerch a gredfe embann pennadoù eneb ar religion? Hag an
 Emsav katolik hag abostolek da drelatiñ!! ... Gwallet an taboù
 gant studierien hirrvlevek karget gant chouchenn ha paeet
 gant ar c'h-k.G.B. Hag e brezhoneg ouzhpenn! Ha darn
 da zigoumanantiñ kerkent...

Koulskoude, me! lar deoc'h, peseurt droug a rai un
 tamm pennad eneb relijiel barzh Yod-kerch d'ar c'helaouennoù
 kristen-tout evel Barr-heol, Bleun-Brug, Studi hag Ober
 gant o sorchennoù mezhus, sorchennoù n'o deus ket
 cheñchet abaoe mint bet sanket e pennoù ar Vretoned a
 daoloù bazh gant an tad maner....

MA! Ar gentel gatekiz a vo ar wech-mañ
 war ur gudenn pouezhus kenañ,
 a vir kenkoulz ouzh ar gristenien hag
 ar re dizoue da gousket: MARI, mamm da Zoue, gwerc'h
 e oa **YA** pe **NANN**?



Penaos eo deuit a-benn
 hounnezh da gaout ur
 bugel, ha n'eo ket forzh
 piw, Jezuz, mab Doue
 ha Doue heñ e-unan, ha
 kement-se hep fouzañ gant den!?



skreutec!
 Biskoazh kement-all!

Dimezet e oa ouzh penn. Gant Jozeb. Dimezet, dougerez
 ha Gwerc'hez! Ar paotr Jozeb a oa stad en e ibil, sartenaman
 heñ a n'oa ket bet droet c'hoazh!

Hag en 20^{vet} kantved n'eus bet kavet diskoulm ebet
 c'hoazh d'ar gudenn pennañ-se. Met tud a labour war an
 dachenn-se ha paeet evezont. Ha dedennet an dud. 36,5%
 eus an ortodoksed, 31% eus ar gatoliked, ha 79,5% eus
 ar brotestanted a sonj dezho n'eo ket amzer gollet studiañ
 gwerc'hted Mari. Daoust da se, 74% an ortodoksed, 58,5%
 eus ar gatoliked ha 18% eus ar Brotestanted (1) a sonj
 dezho eo chomet gwerc'h a-hed he buhez....

(1) Mezha war ar brotestanted! Ar re-se a gach ivez war ar Pal!

ken fier e oa da vezañ mamm da Zoue m'en deus ket gallet Jozeb plantañ e vagh-ribod en toull sakr ur wech ene vuhez. Daoust hag e oa bordeliou e Nazareth d'an amzer-se? Un divinadell da sklaeraat, choazh! Met ne vo nemet ur gudenn hizio e **katekiz Yod Kerch**. Gwerchez e oa, ya pe Gaoch! fidamdoue!! Ma fe, bugale gaezh, ar skiantourien n'int ket deut a-benn d'en em glevet zoken. Sed amañ un toullad responchoù, doch da zibab an hini a zere ouzoch ar muiañ.

1. Mari a vefe aet da choari, chibout gant un truilheg bennak ha goude bezañ gwilioudet he deus kavet ur medisin dorniet-mat evit adrenkañ dezhi hec'h hymen (n'ouzon ket penaos 'vez graet deus-se e brezhoneg, vez ket kavet seurt gerioù barzh ar geriadurioù ur vezh! Ar Sañsur zo partout! Un taol eus an tan maner 'michañs!



2. Mari he defe tapet ur spermato (brezhoneg mar plij!) kollet er privezhioù, laosket aze gant unan eus impligidi Jozeb. Mont a raent da vrallañ o gleier er chioù pa yae ar patron d'ar vourdel. Ar pezh a ziskouezh ivez splann e oa Jozeb ur c'hapitalour-brein, a vewe diwar goust al labourerien, ha n'eo ket ur paourkezh kalficher koad e-giz ma vez kontet deomp pa ver bihan araok mont da gouket. An dezenn-se zo hini Urzhiador Bedel ar Yeched, stag eus an O.N.U. N'eo ket souezh ne servij ket da wall dra an O.N.U. pa weler eg int prederiet gant buhez prevez ar familh sakr.

3. MARI a vefe bet gweladennet gant tud gwer deuet eus bedoù dianaw kollet er c'hozh-mos. Deuet e vefent a-benn da lakaat en he c'hof, on hadenn hep drailhañ he zelienn-kroc'hen. C'hwit oar, an termajied-se o deus troioù-hud, n'omp ket gouest da gompren.



An taol-se o deus graet evit ober pligadur d'ar ^{re}ruz eme Moon, Guru Maharadji, Hare Krishna. Ar re-mañ a zo religionoù modern, yaouank, pop ha tout evit mirout ar yaouankizoù da vezañ taget gant kleñved ar gochisted.

4- MARI a zo ur c'hozh strinkenn lous ha kontet he deus gevier he buhez-pad. Un taol braw, rak daou vil vloaz goude e-kaver tud oñ azeuliñ anezhi c'hoazh



5- Tezenn Yod-kerc'h: Peogwir n'eus tezenn resis ebet e kinnigomp da Vari dont d'ober un tamm tro betek burew Yod-kerc'h. (mont ara da Lourdes. h.all) ha diskouezh deomp splann penaos 'mañ kont gant he zoullig koant Paet 'vo ur banne dezhi hag ur c'houmanant at vitam eternam er Baradoz-



Echu eo ar gentel gatekiz, bugaligoù. Ar wech a zeu :

DAOUST HAG E VO ESKUMUNUGET KENLABOURERIEN YOD-KERC'H ?

Ha n'ankoueit ket Laret ur Pateragunave 'raok mont n'ho kwele!



← KURUN!


«santig Bourges!
Pedit evito!!»

'OA KET DAV
KAS AR BAZOOKA!
'VO KET EZHOMM
SKEIÑ WARNAN
MEMES!

UR SANTRAL NUKLEEL
N'EO KET DANJERUS
ME'DAV EO DIWALL
DEUS UR FORC'H!

SELLIT! AR GURUN O
KOUZHAÑ WARNAN!
EURUSAMANT EO HON
ZOKOU-HOUARN EN PLASTIK!

RIEN A
DECLARER!



TENNET EUS *ouest-france*
hep aotre D.F!

Des bagarres ont éclaté hier, à Cheix-en-Retz, commune voisine du Pellerin, où doit être implantée une centrale nucléaire. Les agriculteurs ont bloqué la commune avec les tracteurs. Les forces de l'ordre répondirent avec des gaz lacrymogènes. Un violent orage parvint à calmer les esprits sans toutefois décourager les manifestants.

(Lire-page 5.)

SKANDAL!!
YOD-KERC'H 'ZO A-DU gant ar POLIS!!!
GELLET EN DIJE AN TRESER LAKAAT AR GURUN
DA GOUEZHAÑ KENTOC'H WAR AR FLIKED!
N'EUS DOUE EBET KEN GANT AR RE-SE!!

AN DELWENN VEIN-MAN 'ZO
BET KAVET GANT ENKLASKERIEN
(FURCHERIEN, PEA!) YOD KERC'H
DINDAN ILIZ VEUR KEMPER
(KOUZHET EN HE FOULL ABADE)
-WAR A SEBLANT E VEFE UN
DELWENN GELTIK, FARDET 1000
VLOAZ'ZO, ARAOK GANIDIGEZH,
HOR SALVER IBIL DIROS, DOUE
AN ORGED.

AR C'HOARI 'ZO GANT
AN DAOU GANFARD N'EO
KET BET KOMPRENET
EVIT C'HOAZH....



COMMENT? VOUS AVEZ
DIT: "PATATEZ DISAC'H"?
DAÑS ROUND? DE QUOI?
DE QUOI?

IL A DIT:
"DAÑS ROUND"

PATATEZ DISAC'H
MA MAMM GOZH
'RAE AN DRA'HE
GWECHALL!!

C'EST DU BRETON!

ECHU 'PEUS
GANT HO REUZ

NA BOURAP!



brocham!
brocham!

Kabidant!

HAG EUR
CHOEZ!



HISTOIRE
DE
BOUGNOULES!

MEZH
'M'EUS

MALOSTOU!

KOLLET M'EUS MA
BRAGOÛ! MICHAÑS
NE WELD KET!

KENER YOD KERCH GALVET
DA DI AN ARCHERIEN. EMAN
AR POLIS O KIASK C'HWEN E LOEROU
AR YOD-KAC'HER. SE 'ZO KAOZ
'Z EUS BET DALE GANT Y.K AR BLOAZ-MAN!

PEGENT
KAER
SO E
WICKAMANT




GASTI
VIKA
DONT
(RHO)

UR MAFIOSI EUS "EMGLEV AN
TIEGEZHOU" O KIASK SKRAPAN ARCHANT. V.K
digant AR SEKRETOUREZ GOUDE GOUEL AR BZH.



Gant un hent digompez, poultrennek
 Dindan un heol c'nwek
 E valee daou gomper drant
 Anezho ken mignon d'an argant.
 An hini brasañ a oa gantañ
 Hanter-kant Lur deus ar c'hentañ
 Ha setu degouezhet ganto souden
 kavout ur bernig kaoc'h
 Ur gaoe'kadenn a larfen kentoc'h
 Rak hounnezh a oa digant Mab den
 "Ur bariadenn hanter kant Lur
 N'afe ket ganneoc'h a dra-sur!"
 Argant a dalu moneiz n'eo ket?
 Hag evit nebeut e vezer prest d'ober
 Gwashoc'h 'vit gwerzhañ hor Salver.
 Setu ar bern lonket, chaoket ne laran ket
 Ha gant an hent en dro
 Ken joaius ha ken dillo.
 Ar bilhed a domme en ur chakod all
 Met, un nebeut kammedoù goude-se
 Setu anezhe kovezhet war ur bern-all
 "Ha kap a vefec'h kement all?"
 Lavaras ar pinvidikaet nevez.
 Peogwir, an azen ruz-se en deus
 Abalamour da betra ne rafen ket?
 Ken buan sonjet, ken buan lonket
 Ar bilhed flour ha dous adkavet
 Ha lorc'h enno bezañ o daou
 Karget, evit netra, o bouzelloù!



Moralite : Ra glasko an droch drochañ
 Atav drochoc'h a vo dezhañ

Yannig An
 Andouig

Notennoù diveradurel : hervez geriadurig-godell (2500 pajenn) An Ad.

GWIDAOUVARC'H

- Gwechall gozhig n'oa ket añv a dorchañ ar reor gant
 delienn baper ha ret e veze d'ober gant deil-kaol. Hag an deil lakaet
 e bern a zeue d'ober ur bern teil (deil → teil) hag awechoù e tiwane
 deus outañ ur boud drev ha mavig ar "boud-teil". Ouzhpenn-se, seurt
 kustum en deus lakaet an dud d'ober an tamm a vez, sañset, da bep hini
 etre e zivorghed "gaol" anezhañ (kaolenn → kaol → gaol) -

Da skouer : Pegement ho kaol?

Respont

Memes priz'vit ar reor!

En em c'houlenn a reer e speredoù hezesket daoust ha ne vefe ket "goal" un dreuzformadur saoznegachet a memes orin abalamour ma vez labour an den-se, stankañ un toull.



Reun Nekeblev.

Bremañ vez kavet tud "treuzreizhet" forzh pegement. Paotred a zeu da vezañ merc'hed pe ar c'hontrol. Sed amañ ur skouer brav →

UR SKOUER evidomp holl!

• Ayant traité les gendarmes de « connards » et d'autres appellations en breton, que les représentants des forces de l'ordre n'ont pas comprises, un soir d'ivresse à Châteaulin, M. Roger Lafaille, 18 ans, de Châteaulin, est condamné à 15 jours de prison avec sursis et à 380 F d'amende.

Gounezet en deus ur c'houmanant da Yod-Kerc'h! Mar d'eo anavezet ganeoc'h kasit e chomlec'h deomp!



GWELET 'TEUS AL LOST ZO BET PLANTET DIN WAR VA C'HAOLENN?

MA WELFES AN TOULL MEUS-ME. ENND TO PLAS DA RIBOTAL, ME LAR DIT!



N'EO KET DIAES CHEÑCH REIZH AVAT. GOULENNIT DIGANT AUGUSTINE LE BRONNEC (ANNET GWECHALL EMILE LE COFFEC)

GANT AR GNISKAMANT-MAÑ EO DEUT DA VEZAÑ AR C'HOF-CHOUCHENN AM OA ARAOK BRONNOÙ EUS AR SAORUSAÑ.



TRI MIL C'HAST! PEGEN AMERDUS EO DISKIÑ BREZHONEG GANT "LE BRETON PAR L'IMAGE"

PEGOULZ E VIN KOUMANANTET GANT MA ZUD DA YOD-KERC'H?



SONENN AN DOURISTED



Sell houmañ 'ta!

Selaouit mat tudoù
Hag e c'hellfec'h klevet
Sonenn an douristoù, sonenn an douristed



ar framm 'zo
mat!



Fais pas chier
j'lis le nouveau snob!

Chéri!
c'est
plein
de
merde
ici!
j'en
ai
plein
la
culotte!



TIREI DIREI DIREI DIRO!
TIREI DIREI DIREI DIRO!

Bouge pas
chéri!

An douristed bremañ a veg gwelet partout
o klask e-pad an hañv, an traegh 'toug
ar mazout....

An tad ar vamm, ar c'hi
A zo e penn ar c'hal
o tennañ poltriji
Dirak un tamm kagal



Lod all er menezioù, Tud bras ha tud
barrek a ya dre an henchoù, Roulot
doch o c'hezeg...



Hag hei, sou ha diha
Ar c'harr a ya en-dro
Mais non c'est pas par
là, la route de
landelo



Hervez am eus klevet
E-kichen kollore g
E vezo digoret
Ur skol 'vit
ar
c'hezeg!



N'hellan ket padout ken
gant ar cheuleuvari
Touristed o pourmen
E-kreiz va
melodi!!

Te'zo
deuet d'ar
staj ie
neuhe!



ur pezh mell/
r'er brav
'peus

Setu ur c'heloù mat
Evit an holl gezeg
Bez' 'teskint galleg mat
En ur skol divyezhek!

GRIT

E-GIZTON

IT DA

WELOUT



Ludik 77

PENAOS

'MAN

KONT 'MAEZ

AR ZOO!

aman FR strouzh ha lañch
kondik barzh an post! shkrer!
Boum! Prout! fais
gaffe, bon dieu!!
Hum! digarezit
achanon met...

(cos)



Setu, neuze, eta, evit ar wech kentañ
un "débat" en brezhoneg
ha an Tele.

An danvez dibabet
da zigentañ a zo
cheñchet. "Tonka-
dur ar e'hwilh-kaoc'h
e Breizh" a oa un
Tamm re stank. Setu
hon eus dibabet
benn fin ar gont
studiañ AR
"sex" war ar
maez da vare
ar marc'h a
OURGOWILH



hum
m'eus aon

Hi! Hi!

Aietu me
fais
mal!

cachotier!

chakerper Alas, An Aotr. An Hir
hag an itron Kerbiniaou ha me
lañch Koudik, atav ken prim ha
neptu!... eh! eh!

oa ket bet
laret din

n'eus ket kalz
paotred
yaouank, m'eus
aon!



HOU!
HOU!

UR SOCIOLOGUE!
An itron De la
Cochonerie (en milieu
urbain)

AAH! Très
bon!


What an
abadem!

Hag an itron
Bleunven, so vloaz,
ha n'he deus ket
gallet dont abalamour
(ah.ah! eh eh!)... ABALAMOUR
Met gwelet vo war
ar film a vo diskouez et
deoc'h!

Petra lavarim-me
degho!

PAP!
SPLATCH!





ober l'amour?
 c'hoari daou ve' laret!
 ha! ya'vat! ma vefen
 yaouankoch e
 tiskouezfen
 dit
 penaos
 e
 vege
 graet!

lampon!



ya! e-giz al loened
 ar paotr a blante e lost
 barzh ar penn-se!
 kea ta!
 genaoueg!



gast...sell!, kas din
 un danva dez ha vin,
 ket pell o c'hoari de'!

Souban
 a
 rafen
 c'hoazh!
 puten

oh! c'est
 pour un film
 hard core!

pour la
 Télé?

puten!
 sav ket din ken!

Tremenet
 an heol
 'biou va
 frenestr.!

extra!

RAH!



en
 Breton!

Toc
 Toc



(1) ur fazi eo : "e reor toaz" eo , anat deoc'h!

UN TAMM DALE A ZO
BET PAKET SETU..E!.O!
oups!! MA BROZH!!...

kenavo!
d'ar sizhun
a zeu en
abadenn:
"Riv d'am
RER
ha spes
d'an
dud"

CIAO!



ZZZZZZ!!

vit ur wech
ez eus bet
plijadur!

Trugarekaat a reomp
an ORTF evit bezañ
roet deomp an
dielloù...



Ler de'i!

- A c'hanta, tudoù! 'mechañs eo deut d'ho pete kelou al loto, 'mechañs eo a. c'houez deoc'h kavadenneziwezhañ hor renerien c'hall, anezhi nevesañ doare da vilverniañ a-grabanadoù gwenneien ha bilhedoù diwar-goust c'hwezerien-clour hor futuriou gwellañ-kac'het.
- Ned, na leñvomp ket, ni, Bretoned hon doive pa vimp dibac'hum, ur c'hoari-monneiz ken nailhall, omp Kustum d'oc'htoñ aba gozhik-amzer. Her c'hoari a reer dre lakaad Kezeg da skuizhvrevañ o faviou forzh da c'haloupad a-hed leviou ha leviou 'benn lakaad blev o fronelloù da baseal al linenn-bal 'barzh mesk an tri c'hentañ.
- An trikon nag eo!! Eya, Netaou paour a labourizion chichant da lostennañ eurvezhioù deus renk d'ar sul beure; Eya, Yannigoù diwar-lerc'h, Divinet 'peus! An trikon, Ata! Nag ur c'heloù! nag a joa 'barzh ennoç'h o c'hoùd e c'halloc'h-hu Kendalc'her da zrochpondc'hoari ha trikoniriachañ da heul fouzadennoù sizhunvezhieg ho sadornvezhioù noz, a-benn vezo arru skuizh ho lost e c'halloc'h Kemered egile, ur modall d'ober ar c'hast, Kēa! pag e venner gonid griffoù dre gemer al loen dre ne vern petore lost.
- Hogen, tudoù Keizh, ne viot ket evid leunbarran ho taoulagad gant ar marzh a wel meurdezus ag ur bagad Nirc'hi o c'haloupad, Rag ar re 'maon 'savared anezho n'int ket evid redeg.
- penaos, emezoc'h, peseant doare loened int? n'int ket reoù koad? Kemeñ!
- Ket, tudoù, Ket. N'emaoc'h ket ganti c'hoazh!

reoù paper, tra ken! alato, biskoazh c'houzh!

- Ned, evid dent en-dro war ar jeu e rankan tared deoc'h ne vo ket tre memes doare c'hoari ganeomp hag e Bro C'hall: An diforzhiq nemeti 'vo es ne yal liard-toall ebed en ho chakodoù, mont er-maez ne raint ken. Sell! ha damspurmantiñ 'rafen liv ar chal war ho fasoù trelaket? 'Dal ket 'r boan.

- Ec'h an bremañ da ginnig deoc'h hor mirc'hed, nes disoñjal memestra, o ferc'henned.

- War va zu Kleiz, An Ao. Ler Lakez Mallas, mondian ana-vezet, graet gantañ gouzer e loan e bravañ gwele. Kloz a Vro Vigoudenn, Nag hael e gaval ourgouilh hirc'hoefet ha brudet Kaer (Journalourion Y.K o deus savet ur pennad diwar e benn, Na petra!) beteg-hen n'eo ket bet distradet Ned diwar re a urud hag a chervad ec'h a bremañ e gof a-stlej gantañ tra ma red. Ha daoust dezhañ gouzoud diouzh straniñ 'dreñv skramm an tele, n'eo ket gant e galite e xelo ar maout

- War va zu dehou an Ao. Sapre Kalc'h, 'News aon n'eo ket aet e jav astennet da c'hourvez e flut-kloz egile, petra bennak ma kav ive e walc'had gant blaz an traoù kozh. Rouez eo ar gwel eus foened eveltañ: trent Kagn, tagus tagous, trent, Broudet gant an droukrañs, an echeve, ar fae hag an dispriz war ar re all. Hag-eñ diwarreg a-grenn da gristilhañ an disterrañ bomm brezhoneg a vennfe Kenteliañ reoù all war o "doareoù-stourm"? quell d'ar pegaz-hen dent en-dro war an douar pa ne wel anezhañ nemed dre c'hraupe dre ziribin e varzhoniezh, gwelf gantañ tevel war an dachenn-se pa n'en deus graet netra muioc'h evid egile.

Setu hon roñseed toudoù, Sterniet brav, o klask enem vac'hañ. Ra grevint dre hen ober hag hon do peoc'h gant o c'honchennoù didalvoud.

Kar. e. gerc'h

EMVOD YOD KERCH 1977!

CHEÑCHET TOUT AR STROLLAD
HA C'HOANT DEOC'H GOUT PIV INT
(evit no lizhiri kunujennoù!)
-boutet er pod-laztez kerkent!

Tudou! Amanñ 'mañt!

on va leur
Botter le cul
à ces putes!



* DIVINIT PIV EO AR RENER!
EVIT AESAAT AL LABOUR!


an hiri nemet
UR PLACH ED!



- 1° N'EUS KET AN TELEFON BA'E DI
- 2° UR GRAVATENN "GLAS. GWENN. RUZ" 'ZO GANTAÑ
- 3° E RAZOER A ZO "MOULINEX" HAG A YA EN DRO GANT AN NERZH NUKLEEL!
- 4° NE EV NEMET PERE BENDIT! TAGET EO GANT AR GUEVELITE!
- 5° TOUZANÑ 'RA BLEV E REOR BEP SIRHUN 'TI E BERUKENNER MUIAÑ KAC'HET!
- 6° NÉO KET KOMANANTET DA LEKO d'la MAUD!
- 7° FAZIAÑ A RIT MA GAV DEOC'H EZ EO AN TREDE WAR UNTU kleiz!



FOS TOUT! KOÑCHOU-BORN!
SE 'ZO EMVOD 65! AR
WECH DIWEZHAÑ EDO MEZO
AN IZ-RENER, MEZO IE
AN DANVEZ RENER HAG AR
RENER 'DA KET DEUT
MEMES! GANT AR VEZH!!



ADEM BANNET GANT **YOD-KERC'H** EVIT AR WECH KENTAN TINTIN E BRO AR 4 SKRITUR! (gant R.G)

KOUMANANTIT DA
YOD KERC'H!

10,00 Lur

kas ur chekenn da:
 G-KOMZ hag ARZ
 breizhek
 B.P. 1305
 Rennes Villejean
 35016 - Rennes Cedex!



KORNAR GALLEG!!

Numero CPPAP : 56577
 Depot légal : 4eme Trimestre 1977.
 imprimé à L'atelier d'ART GRAPHIQUE - club Léo Lagrange - Roazhon - (Rennes)
 YOD KERC'H : NUMERO 13 - prix : 1^{er} 500 exemplaires -
 Directeur de La Publication : Tudual HUON - CONFORME A LA LOI!